

# DA BROSPËR PROUX

Dirak he Skeuden-Ven, savet en Gwerliskin d'an 21 a viz Gwengolo 1919

*Itroezet hag Aotrone  
Ha kement so deuz va jilaou  
Me c'houlen ouzoc'h trugare  
Mar fazian na laret gaou.*

Setu savet war e sijen,  
Dirak Ti-Kear en Gwerliskin,  
Skeuden Prospër, ar barz laouen.  
A lake peb breizad da c'hoarzin.

Piou neuz ket klêvet en hor Breiz  
Kana soniou koant Prosper Proux ?  
Na pion ne zaill ket c'hoaz he greiz  
Ouz o jilaou er pardonioù ?

Rag neuz ked bed, ha 'vo ked c'hoaz  
Speret muioc'h lemm er vro-man,  
Ha koulskoude me glêo, siwaz !  
Tud kazuz o trouk-komz anezan :

Prospër Proux, paotr lemm a zeder,  
A well blije dezan farsal,  
Laret hag ober taoliou-kaer  
Evit didui an dud-all

Kalon léal den mad kenan !  
Kement a neuz en hanvezet  
A dou ! na n'eo ket er gear-man  
Nemet brud vad ha mignonnet.

Ha ma neuz gret soniou flemuz,  
Evit rei nerz d'ar brêzonek,  
Neuz savet re garanteuz  
Hûel, gwirion ha kalonck !

Ze n'harzo biken Yann ar Zec'h,  
Gant he c'hoar vraz, al loudouren,  
Da zevel beg he fri d'an nec'h  
Da glask an tû dont d'en dispen :

« Daoust a wit petra-ta 'raer  
» Ker braz Iorc'haj, n'hag eur skeuden  
» D'an hini 'oa met eur gouper  
» Gant he vern soniou diskempen ? »

Evit petra ? n'er gwelit ked  
Eo 'vit rei d'ech eur gentel vad ?  
Ha ma n'ententit ket hepred  
Vo c'hoarzet muioc'h war ho stad !

Daoust a kaerder ar sperejou  
Oe biskoaz mouget gant tud sod ?  
Prest da nac'h ho yez, gijou,  
Gant m'o devo ar brassa lod ?

Nann ! ni neump en korn ar Bed koz  
An urz da gerz evél em pep Bro,  
Ha né ket gant eur bonet noz  
E yél an traou ganemp en dro :

Urz da gana gwirioneou  
Na reont drouk nemet d'ar re  
Deuz 'vel ar re-man gwall deodou  
Hag a skuill bulum noz ha de.

Ogen, an hini n'euz kredet  
O displega ken brao ha Proux,  
Om difuni pa 'oam kousket,  
A gle kaout peurz en enorioù.

Kredabl a benn c'hench peun d'ar vaz,  
D'ar c'houlz 'oa trenket ar zouben  
Oa rei dezan evit rei blaz  
Laket henni pep hag helen !

Ha kaeroc'h wit ar barzet all,  
Da zouplad an taol d'he nesa,  
Prospër, den dinoaz ha gadal,  
N'em lak ec'h unan da genta !

Eur broud n'eo bed pa oa ganet,  
Ha broudet 'neuz hep sonjal drouk,  
Er yez a n'eo aman disket,  
Gant ar zam brasa war he chouk ?

D'ar c'houlz a ma wêe neubeud  
E m'eum eur yez kaer ha dispar !  
Ha ne spont ket dirak he skeud  
Gant hini all war an douar ?

Rag pell a oa ne glêvemp ken,  
En hor brêzonek marellet,  
Met kana soniou trist a ven,  
Oa mad da zigas c'hoant kousket.

Kloareyen yaouank barodus  
O rimaillad d'ho maestrezet,  
Ar memeuz litanioù hirvouduz,  
Vel en gouperou ar ranet.

Met aboe ma zè *dispaket*  
Prospèr gant he delen dispar,  
Ar re man gwelit, mignonet,  
A zo chomet holl dilavar :

Sétu perag he skeuden-zen  
Cret gant Hernot ha Killivik,  
A *zispak* soun deuz kreiz ar Men :  
« C'hoarzomp, emezan, eun tamik ! »

Ha kerKent all ar stern en dro  
Da fluta soniou ker fentuz,  
Ma sao em pèvar c'horn ar Vro  
Ar c'hoarz a lak an holl évrüz !

Rag piou na c'hoarsfe ket, tud kez,  
O klévet son ar merc'hetaer  
An Dogan, Paotr he ziu vaestrez,  
Margot ar Bik hag ar Vuc'h laer ?

Ped n'o deuz ked renket trital  
O klevet tro-zro em pep tachen  
Distaga, gant Charlez an Dall,  
Son Gwillemet ar gouillouren ?

Piou zo ganet er gristenez  
A na zant ket he oad e virvi  
Pa gléo ar c'hanfard o kovez ?  
Pe moereb Kato gant Pipi ! ?

Ha piou neuz ket bet plijadur  
Gant son « An Den zamet pouner » ?  
Gwir farserézou dreist muzur,  
Met ijnuz, leun a gaerder !

Gwelit c'hoaz pegen aketuz  
Eo hini « Mari beg araog » ?...  
Keno, rimadel inouñz ?  
Ar maout 'so d'ezan em pep krog !

Ha betek Eostik Koant-an-Noz  
Allaz ive 'renkaez tevel,  
Yann ar Skour, n'eur rei he vennoz  
D'ar barz Prospèr araog mervel.

Fanch an Hùel a Blouaret,  
Kermarker, Brizeuk ha kalz all.  
O deuz a vouez hùel laret  
Na n'eo ked he bär da rimal.

Klévet 'meuz Anatol ar Braz,  
(P'hini, siouaz ! 'm'an ked aman)  
O laret stard 'oa ked gret c'hoaz  
Ken kaer zoniou evel gantan.

*Kiniad ar zoudard* 'vo bepred  
'Mezan, unan ar c'haera a zon  
En kement langach so er Bed,  
Da stoka 'velti pep kalon !

Trôet è bed e gallek rik  
Kanet dre holl barz em Breiz-Veur,  
Ha betag diont en Amerik ?  
Lêc'h e m'eump ive gwir vrendeür

M'ar dè ta brudet e zoniou,  
Beteg a bell dreist ar mor braz,  
Kredabl goude ken kaer gweliou  
He vemor a vo muioc'h c'hoaz,

Rag en hor bro goant Breiz-Izel  
Gant kement den a skiant so  
Gléver met eur vouez o sevel  
Oc'h ober enor d'he hano !

Beteg ed deiz all e kleviz,  
O tremen Loguivy-Plougraz,  
Monseigneur Dubourg, kenvrôiz,  
O rei d'ezan meuleudi vraz :

Laret a rae green mad he vouez,  
Ar C'Hardinal, eur gwir Vreizad,  
E karche beza en hon touez,  
Hag e tigasche e vennad.

Petra dal-ta da dud iskiz  
Goude testeniou ken kaer !  
Klazk c'hoaz dre stummou diaviz  
Nac'h he c'nalloud hag he vrasder ! ?

Met boutou hër oe a viskoaz,  
En hon amzer vel 'n'he hini,  
Hag ho ferc'hen a glaske c'hoaz  
Meska, n'nozout hag enebi.

(*Chanchamant ton*)

Vel pa oaz beo, dalc'h sonn da benn ?  
War da zijen, o barz leal !  
Ha laez Yann Bitoch da dremen,  
Hag ar chass tangnoz da c'harzal,

Da genvrôiz dre ar Men-man  
A rent did ar brassa enor !  
Ha kement hini 'zo aman  
A zoug en ho c'hreiz da envor !

Trugare dè d'a veza deud  
Da rei d'ar gouel-man he gaerder  
O c'hopal skiltruz dirad da Skeud  
« Resusitet ez eo Paospèr ! »

Deud è ja daol da veza gwir,  
Ha divarvel da oberou !  
Grass d'hom c'henveur, ar barz Taldir,  
A gerz ive war da roujou.

Pebeuz stad en hor c'halonou,  
Ganit, o barz muiian-karet !  
Goude beza trec'het Gwillou,  
Hag e bobl heuzuz diskaret !

Na pebeuz lore'h gant da iac  
O klevet 'oa demp al lôreen !  
Hag o welet aman hirie  
Eur strollad tud en da gichen :

Perag ive ma zelen gaez,  
Ken dlster en kever da hini,  
N'hell ked gant muia a levenez  
Laket ho c'hreiz da freälzi ?

Met pa z'out n'hon toez a neve,  
Hellan tervel : rak da zoniou  
Vo breman kanet adarre  
Goasoc'h evit biskoaz, m'en tou !

Gwir Vreiziz, paotret stard bepred,  
A nerz kalon a gano zur,  
Da zoniou beteg fin ar Bed  
Evit kemer ho flijadur !

Barzet yaouank all a zavo  
Da gana d'emp brêzonek c'hoaz  
Tre 'vo merc'het koant er parko,  
Ha bdez dindan an oabl glaz !

Pa peuz digoret demp an nor  
O kana ken brao em pep stum,  
Bugale vihan Breiz-Arvor  
Da c'heuillo serz a rum da rum.

Tro d'ar vombard, ha jabadao !  
Kaniri, danso, lid a leiz !  
Sell n'hag a wiskamanchou brao !  
Difunet e teuz paotret Breiz !

Pebeus enor ! o barz lirin,  
Hirie d'hor bro gaër Breiz-Izel !  
Ha dreist holl da gear Werliskin,  
O tigemur c'hoaz ho bugel !

O pebez lore'h evit da dud  
'Zo aman dirakoud ive,  
O welet eo ken beo ar brud  
Hag envor barz *Bombard-Kerne* !

Enor did-ta, Breizad gwirion,  
Tad ar varzet, maestr an delen ;  
Trugare did a greiz kalon,  
Ha meuleudi da virviken !

Ch. ROLLAND.